

# KRIM BRAS BULAT PESTIVIEN

Woar ton : *Kentelliou ar Vered*

## 1<sup>er</sup> COUPLAD

Brëtonet a vreiz-izel didoted da glêvet  
Eur récit deus eur malheur zo névez hoarvëed  
Klêvet a memp alies koms a gals a krimo  
Mës héman héo ar lachan zo hoarvëet n'em bro.

2

Bars ar blavez mil-naohant-houec'h warnuguent  
Ouspén héo cométed ar hrim-man en Bulat-Pestien.  
Héo comméted en torfet en dost da vourg Bulat  
En villagen ar horong vit réi d'ac'h d'intent mad.

3

Nao warnuguent a viz-kerdu da oneg-heur deus en-noz  
Pa oa en holl dud a fësson o kémer o repos  
Pierre Guégan ag ë bried oa ivé no guélé  
Pa neo aru toul o dor Jean Verge ar guernevez.

4

Da houl diguerri dëan evit kavet arh'ant  
Peo hent o daou da vervel no zi soubikémant  
O Kêvet é prépojou en doau-zen kos spontet  
Ar meïs demeus o gouélé buan int bet deuet.

5

Evit hars ar muntre-man da antren ë no zi  
Mës satan prinz en ifern zo stard da gontanti  
Dré zikour en droug-spéred a n'eus toret en or  
Ag ëo entrëed a warnë gant eur gontel digor.

6

En em entren bars en ty héo saillet a warnan  
Reï a ra dean eur maro deus ar ré gruëllan  
Massacret neus a néan ar hriminal barbar  
Gret neus ken goas ar Judas woar leïn Menez-Calvar.

7

Doué a neus perméted ag ë vam ar werc'hez  
Dé bried da échapi a galout dont ar meïs  
Hep a neus guélet armuntre héo deut dré drëg ë gueïn  
Hi rédeg da vourg-Bulat diskabel, dierh'en.

8

Da glask tud é woar ar lec'h da welet ar suget  
Ag en pëo sort stad pitoyabl oa é fried rentent  
En dud a oa no goulé a kémer o repos  
Ag a zo bet spouronet dar houlzé deus en nos.

9

Met pa deus bed comprénet buan int bet zavet  
Pa n'int erru war a lec'h o halon zo bet fraillet  
Pa n'int antrëed en ty holl o dont kalonad  
Pa deus guélet an den kos-man ébars e r poul-ar goad.

10

En den Coz-koeïs man glemë na oaket hoar-marô  
Ar muntre oa partiet ag échapet né dro  
Neuz é ewoar ar leur zy deus kavet é gontel  
Honez oa testéni kentan demuez ar hriminel.

11

Pierre Guégan a oa hoaz né anoudéguez-vad  
Ag a houlé ar bëlec da zont d'in kovésat  
Partiet a zo daou-zen deus a ré oa ennan  
Da wit dëan é Zacramancho wit ar wec'h divézan.

12

Daou-all dar guëir a Gallac zouden zo partiet  
Da avertissan médecine ivé ar gendarmet  
An docteur gant é auto zo dérédet buan  
Ag a nem rent ar horang woar dro Pierre Guégan.

13

Pa névez en bizitet a guelt ëo vleisurio  
Neus laret en é gostë eman tol ar maro  
Na oaket wit en soignal vit en harz da vervel  
Ré don a oa antrëet laouden ar hriminel.

14

Da seïz heur deus ar mintine neuz rentet é vué  
Kri a viië ar galon en d'oulagat na ouëlië

15

Ar gendarmet zo aru ben eur pennad goudez  
A pa deuz gret o égal h'int et dar Guernévez  
Pa deuz goulet en doarë demuez ar hriminal  
A zo lavaret dëzë oa het da chasséal.

16

Oar bészort direction houlaz ar brigadière  
Ag a zo laret dëzan war du Goarem-Balère  
Hep koll eur momat amzer int partiet dustu  
Ag a deuz kavet énéan woar douar Tronjolu.

17

Pa deus guélet ar malheurus ag eur fuzul gantan  
Na noujont pet-zort fësson monet a warnéan  
Met ar brigadier vaillant na oaket da ziski  
An eur avanc é pajou houl digantan é permi.

18

Ag é vonet dé hodel wit tapout é papère  
Ben neuzë woar ë fuzul oa dorn ar brigadière  
Daou gendarm-all a oa-hoas ag a zeuaz var-lerc'h  
Enan oa bet finisset chasséadec Jean Verge.

19

Neuzë ëo interroget éno gant ar polis  
A laket woar eo zaou-zorn goasko en onestis  
Pa o ont deuz en garoti o deveuz in gouélet  
En fourcho é viziet chomet hoas goad rivet.

20

Neuz éo diket dëzan kontel vras ar malheur  
Ar skul zo ret deizi zotan pa vez aru an heur  
Moeïs pa n'ëo bet interroget a neus bet respontet  
Oa kollet gant en évac'h n'oa zonc'h a nétra-bet.

21

Neuzé gant en tri gendarm eo kasset dar mairi  
Da hortoz parquet Guengamp d'ober en otopsi  
Une a trégont a viz kerdu bars en mairi Bulat  
Oa digoret Pierre Guégan dirag ëo zaoulagat.

22

Pa n'ëo kavet plaç ar laouden en toll noa in lahet  
Ar gendarm larez dëzan den fall zell a heuz-gret  
Evit guélet kalon é yont a kenkoulz all é oad  
Na strinket eur bérad demeus é ziu-lagad.

23

Gret ëo en opération ar horf zo harchédet  
En dé kentan vis-guenver ëo bet interret  
Ag ar Verge en o auto zo kasset da oëngamp  
Da séjourni da borz anken da hortoze jujemant.

24

En eïzet a vis ar foën tribunal Sant-Briec  
Neuz kondanet ar malhurus hervé neuz méritet  
Tri warnuguent a testou zo bet wit en affaire  
Ar wirionë dar justic o deuz espliket-sklocër.

25

Pa n'ëo tremenet en testo zo lennet dirakan  
Gant ar ministère public é sëtans dévëzan  
Na neasket bet évan nak eskus na pordon  
Bet neus wit é récompans dek-vloa réclusi on.

26

Zëtu da bénoz éo kiriet ar boïsson en alcool  
Peguen liez a vugel éo kiriet dont da goll  
Diwoar boïsson pervuan a vé gret ar hrimo  
Mes en den drë é natur a neus ivé viço.

27

Tud yaoanc en amzer brésant ag a ré zeuyo warlec'h  
Na heuillet ket vué a neuz heuillet Jean Verge  
Diwoalet deuz ar boïsson sourzen en oll viço  
A kass en den da vervel béték ar galéo.

Compositeur : **Jean LE BRIS**,

Cultivateur à Pont-Melvez, mentionner.

Pa néveuz en bizitet a guelt eo vleisurio  
 Neus laret en é gostë eman tol ar maro  
 Na oaket wit en soignal vit en harz da vervel  
 Rê don a oa antréet laouden ar hriminel.

Da seïz heur deus ar mintine neuz rentet é vuè  
 Kri a vijè ar galou en dioulagat na ouëlje  
 Welt ar maro kri a barbar deuz a beurz eur poultron  
 A néveuz lazet eo yont hep suget na raison.

Tud yaoanc en amzer brésant ag a ré zeuyo warlec'h  
 Na heuillet ket vué a neuz heuillet Jean Verge  
 Diwoalet deuz ar boisson sourzen en oll viço  
 A kass en den da vervel bétek ar gatéo.

Compositeur : **Jean LE BRIS,**

Cultivateur à Pont-Molvez, mentionner.

Propriété réservée à M<sup>lle</sup> LE BUANNEC,

Plougouven (Côtes-du-Nord).

Prix : **UN FRANC.**